


CHANSON NEVEZ

VAR SUJET AN ARC'HANT.

Var un ton ancien.

ME ho ped oll, asistantet, da selaou mad va chanson,
Caout a reot enni, me gred, un nebeudic a rêson;
Mes na zit qet d'en em choqi deus ar pez ho p'o clêvet,
Rac ne meus, me en assur d'êc'h, c'hoant da facha den ebet.

Clêvet a ràn deus a hep tu nombr a dud o vurmuri,
Var ar chenchediguez arc'hant a so ret effectui;
Louiset-aour, pesiou scoët, daou scoët, pesiou c'houec'h,
/daouzec guennec,

Ha pêvar guennec varnugent, a a so cuezet var o beg.

Bureayou so digor dre oll evit chench d'êc'h hoc'h
arc'hant,

Rac se, va mignonet, n'ho pez nep sourci na nec'hamant;
Beza ho pezo en echanh peziou brao ugent real,
So calz êzetoc'h da gonta, hac en peb fêçon leal.

Sonjit nac a drein ho poa-hu er marc'hajou, er foariou,
Nac a zisputou a save evit tremen ho pesion!
Darn a c'houle pêvar guennec, ha re all pes evit pes,
Hac alies e c'hoarveze meur a seurt fallagries.

Mes bremâ ne vezô guelet en hor brô guer eus a Franc

2

Nemet arc'hant ès da gonta, trugarez d'ar Brovidanç!
Ar pesiou aour, ar re arc'hant a vezo mad ha leal,
E plaç an arc'hant ancien, alies a vije fall.

Goulennit digant ho tadou nac a boan o d'oa guechal
O tisqi conta! Mes hirio dre ar system decimal
Ec'h ellit hep nep genamant ober en nebeut amzer
Ho contchou ar re diessa en ur fêçon eün ha sclêr.

Brêmâ sur e vezo ranqet digoach an arc'hant, an aour,
Ha maleurusamant disquez p'e zoar pinvidic pe baour.
Meur a hini a vo souezet o clêvet oll dre hon bro
Avanturiou arc'hant cuzet, ha meurbet a estono.

Mes, pa sonjân en usuiller, n'ellân miret da c'hoarzin,
Ous en guelest qen glac'haret, prosternet var e zaoulin,
O poqat d'e aour, d'e arc'hant, cuzet ganta da loueda:
E galon a saill en e greiz, e mân prest da fatica.

O va lesiou qès! emezân, va c'halon ha va ene!
Va oll attachamant d'ar hed: ia, te eõ va Doue!...
Pell diouzon, peorien infam! tud er boan hac er chagrin!
Amâ ez oun var va arc'hant, amân gant joa e varvin.

Evit güir e zeus lavaret e voa an arc'hant ato.
Ur mad souveren ar brassa e peb amzer, e peb bro;
Rac gantân bepret e tizer d'ar but ma hon deveus c'hoant,
Ha disterroc'h eguet netra e zeo un den hep arc'hant.

Un dervez em boe ur proces hac am darabuste mad,
Ha me da gass va faperou gant joa vras d'am avocad;
Ar mestr fripon, pa o guelas, n'elle qet lenn ar scridou,
Mes daou bez daou scoët a-rois da servich da lunedou.

E ty un noter e zoun bet gant va c'hos habit berlench,
O c'houlen hac én a elje eus va arc'hant ober chench;
Mes va faour qez habilamant na frise qet mad d'e vin,
Ma commanças gant disprisanc dindan va fri da c'hoarzin.

Eveleur paour qez reusudic, va zoc em dorn hac em za,

An noter a c'houlen ouzìn ha calz a beziou em boa :

» — Beza ac'h eus-te, va faour qèz, tri pe bêvar bez daou scoët ?

» — Autrou, a respontis dezàn, deg mil ameus dastumet.»

Cetu va den en eur joa vras, o qerc'hat dìn ur gador,
Hac ous va zrêti, m'oc'h assur, gant peb soign, gant
peb enor.

O va arc'hant! a sonjis-me, pebes pouvoar ac'h eus-te,
Pa elles, en eur minuten, renta poli evelse!...

Hac ho pez ar speret brassa hac ho coalc'h eus a furnez,
Assur, dilezet e vezot, rac se n'ho pez nep souez :
Arc'hant! arc'hant! bepret arc'hant, pe ne dalvezot netra,
Ha bepret e vezot sellet evel ur paour qès *petra*.

Guechal Suisset en em rentas en audianç ur roue,
Da c'houlen arc'hant digantàn abalamour da Zoue!
Yalc'h ar roue voa disec'het, hac én respont : Na meus qet.
Mes *Tartaïf* prest a replicas : Pas arc'hant? pas a Suisset,

En eur antren er bed paour-mâ, eo ret digueri ar yalc'h,
Pa zemezer ha pa varver e ranqer c'hoas rei ho coalc'h;
Anfin, na zoar evit ober netra hep an diaoul arc'hant;
Hac e vez rognnet ar pesiou, outo e zeus bepret c'hoant.

Marteze na ouzoc'h-hu qet perac eo roud ar pesiou ?
Eleal c'hoant voa ma ruilljent dre'n oll rouantelezou ;
Rac n'eo qet vit en enterri e zeo bet grêt er guis-se,
Anes, ec'h ellit credi mad, e vije bet grêt carre.

Daou scolaer yaouanq o tistrei d'ar guær vit ar va-
cançou,

A velas ur men var b'ini voa tracet lizerennou ;
Unan anê a guers ato hep ober nep cäs a se,
Mes eguile a chom eno, ha rêson bras en devoe.

Ar c'homzou-mâ prest a lennas : « Anâ ema va ene. »
Ar pautr yaouanq oll estonet, a sonch un dra dindan se.

**Yenna ra ar men, hac e fouill doun bras ebars en douar,
Ha gant ur joa vras e lennas demeus sclêrijen al loar :**

- « Te pehini ac'h eus gouezet donet ervad d'am c'hom-
pren,
» Qemer ar vouest so dirazout, tach d'e laqat var da benn;
» Cass anezàn ganes d'ar guær, hac e p'o contantamant,
» Rac caout a ri, p'en digueri, daouzec mil scoët en ar-
c'hant. »

**Mar d'oar eurus dre an arc'hant, e zeo assur pa deuer
Da soulagi an infortun evel bepret m'en dleer;
Rac ma sant an den obliget ur joa vras en e galon,
An hini a oblich ivez so eurus en peb fêçon.**

**Clêvet ameus comz a un den demeus a ur voyen vras,
Hac en devoa calz mignonet, vel a veler hirio c'hoas;
Hep dale gant nombr maleuriou e voe en oll revinet,
Ha ractal e faus mignonet o d'oe oll en dilezet.**

**P'en em velas abandonet gant an oll en e vizer,
En em gav oblijet neuze da c'houlen e voued dre guær.
Asten ra e zorn disec'het da dud en doa oblijet;
Mes refuset e voe ganto, ha gant humor chasseet.**

**Beuzet neuze en e zaelou ha treantet a c'hlac'har,
E cri eus a fonç e galon : adie mignonet barbar!...
E benn stouet var e beultrin, en eur stat eus an trista,
Ur soulajamant prest a sant : e guy deu d'en cherissa.**

En un ty dister ec'h antre, hac en deus un tam bara :

- » — Mar plich ganêc'h, ur c'hinouad vit ar c'hy
ameus amâ...
» — Perac, eme ar vreg neuze, e virit-hu al loen-se,
» Pa zeo güir oc'heus oc'h-unan poan o souten ho pue?..»
— Ho reproch am scò em c'halon, muioc'h eguet na
sonjit,
**Rac ma vouifec'h va oll boanniou, na gomzsec'h qet vel
a rit,**

Mar teu din dilezel va c'hy, piou am c'haro bars er bed!...
En a so va mignon fidel; nan... n'en abandonin qet...

Mervel a ra ar maleurus, ha casset prest d'ar vèret;
E guy hepquen en e heuille, hac én oll digoncertet.
Corf e vestr paour êt en douar, ar c'hy a chomas eno,
Hac antronos pa errujot, al loen qèz a voa maro.

Clêvet ameus, em yaouanqis, comz demeus ur roue
puissant,
Pehini na voa occupet nemet da zastum arc'hant;
En eur brezel e qemeraz ur roue all prisonnier,
Hac er stagas demeus e gar a driomph endro da guær.

Pa voent rentet en e bales, an orgouill a ras dezàn
Disgeuz e appartamanchoù d'ar roue maleurus-màn :
— Sell, emezàn, eus a bep tu an aour, an arc'hant
bernet,
Hac anzav ne zeus bet biscoas qen eurus den yar ar bed.

— Sir, eme ar c'hèz prisonnier, evit anzav an dra-se,
Gortozomp ma vezimp rentet betec e fin hon bue;
Me so bet ivez pell amzer puissant ha meurbed eurus;
Mes sellit ac'hanon hirio peguement oun maleurus!...

Emâ souden so rançonet hac a retorn prest d'e vro,
Hac hep dale eo angajet en ur brezel goual garo.
Eguile d'e dro prisonnier a so ractal chadennet,
Ha laqet e fonç ur prison da zeport beza dêvet.

Berned e zeus neuze qeuneud evit dont d'en devori;
O Doue! me ar maleurus, emâ so ur maro cri!!!
Pa voe placet er bern fagod, e c'houlenn dre c'hraç Doue
Accordi dezàn ar faveur da gomz demeus ar roue.

— Sir, emezàn, leun a zaelou, sonjit bars en aroganç
A zisqueuzis dêc'h em pales, pa voan leun eus a buissanç :
Ia, hirio me anavez ne zeus nep boneur parfet;
Grit diouzon oll a guerot hac hervez a zeziret.

**Deus ganén bremâ d'am pales, eme ar prinç generus,
Guelet a ràn e vi bremâ un den mad há vortuzus.
Corriget demeus da orgouill hac eus da avaricidet,
Mar qeres epad hor buez e vimp hon daou mignonet.**

Selaouit c'hoas un avantur, mes dreist oll calz ple-
santoc'h,

Ha na ello, a gred din-me, nemet dont da blijout deoc'h;
Mes en eur fêcon differant e prouvo patantamant,
Penaus ar güir boneur er bed n'eo qet atao en arc'hant.

Ur savater a laboure en ur c'hos tam caborel,
Qerqent a goulou deiz eno azezët var e scabel;
Ur blijadur voa e glêvet o cana, o c'huitellât;
Guyê voa oll evel ur pinçin pa vije o labourat.

Mes un autrou, e amezeg, jalous deus an den guyê-màn,
A deuas un deiz d'e gavet, hac a lavaras dezàn :

» — Terri a res va fenn bemdez gant da chansonniou,
deiz nos;

Rac-se me as ped da devel ha d'am lezel da repos.

« — Dal.... cede aze daou c'hant scoët, mes gant ar
gondition

» N'as clêvin mui o ravaudi na gant c'huittel na chanson.»
Ar savater anter-follet gant ar joa ous an arc'hant,
A redas d'e gaç d'e vreguic, carguet a gontantamant.

Adalec ar moment fatal m'oe an tenzor en e dy,
N'elle na dibri, nac eva, na memes taun fredoni :
Bepret pluchet var e arc'hant, en deus aoun e vent laeret :
Adieu d'ar joa ha d'ar boneur, n'eu deveus mui a yec'het.

« Dispitet eus a guementse, e qemer prest ar yalc'hat,
Hac e red demeus e oll nerz, da dy an autrou timat.
Dalit ho cos arc'hant daonet, sourceneus va oll boanniou;
Me garfe e ve pulluc'het... Rentit din va chansonniou.

Neus qet gouall bell ec'h erruas d'un den avaricius
Mont d'o gao evit contempli e arc'hant a voa en cus;

Mes an nor o veza varnàn en em serret clos en,
Na ellas get a sortial, hac e renq souffr ar maro.

Arc'hant, ô arc'hant milliguet! nac a zroug ac'h
eus-te grêt!

Arc'hant, ô arc'hant benignet! pet na c'heus get si-
couret!

Oh! ma vouifet ar joa ardant a santer, pa rêr ar vad,
An oll a hastfe da sicour ar paour-qèz hep heanat.

Un all, dastumer piz ivez, hac en em leze mancout
Demeus a voued hac a zillad, hac anfin demeus a dout;
Pa voe maro, an invantor na yê get da bêvar scoët,
Mes, sellauit, me ho suppli, pegument voet estonet.

Un nizes paour en em gavas, hac a voa glac'haret bras,
Hac hi goulen vit he loden croc'hen bouret ur c'hos cas
A voa var un famic prezic, qempennet qen brao ha tra,
Gant un tol bas voe discaret; mes guelit na pebès joa!

Ractal ar c'has paour so crevet, hac e ruill var an douar
Ur gïao a louiset aour melen; d'o dastum prest bras e
zoar.

Dastumet piz ha contet reiz, e cavjot pêvar mil scoët:
Me ho lèz da gonsideri joa an nizes d'o guelet.

Ur filouter, un deiz marc'hat, a grie var boes e benn;
Antreit amâ, mignonet, deut... n'ho pezo qeuz biquen:
Amâ e tisqeuzer an diaoul d'ar re fell deo e velet,
Ha gant un hast eus ar brassa ur foul tud so antreet.

Ar c'hos coqin a denn qerqent ur yalc'h demeus e
c'hodel,

Hac a voa gollo en antier, carguet hepqen a avel:
Ha! emezàn, ha n'en deo get an diaoul eo an dra-màn,
Digueri ur yalc'h ha nonpas caout netra ebet ennàn?...

An aour so bet idolatret gant ar paour, ar pinvidic,
Implijet gant profusion en templ caer ha magnific

Demeus a guær Jerusalem, gant ar roue Salomon ;
Un dra estranch e zeo clêvet a se an description.

Piou benac a ell possedi en e dy aour hac arc'hant,
A dlese alies sonjal ebarş er gontantamant
A eprouver o soulagi an den a so maleurus :
Se eo sur ar brassa bonheur evit an den vertuzus.

Christoph Colomb, den brudet bras, a zizoloas guechal
Bro an aour, bars en Ameriq, dre' speret dreist ordinal;
Americ Vespuc, mahomer, goude yas d'ar memes bro,
Ha dre'n ingratiri vrassa e ro dezàn e hano.

An aour, an arc'hant alies a ra nombr demeziou ;
Rac na sonjer nemet enno evit ober eureujou.
Ha, ma sonchfet mad gouscoude neo qet se a rent eurş ;
Mes honestis ha carantez, yec'het ha calz a vertus.

Mes, ma ve ret din recita oll effejou an arc'hant,
Birviquen n'alfen achui, ma comzlen d'am santimant.
Ur mignon ameus bet guechal, a lavare evellen :
Tao, va guinou, ha bez seder, hac e tebri bara guenn.

Ar meurs, trêgont mis Guengolo, mil eiz cant pêvar
ha trêgont,
Ec'h achu'r peziou ancien er c'hommerç d'antren en
cont ;
Er memes devez-se ivez e composàn va chanson,
Evit m'ello e peb amzer sonch en deiz-se peb Breton.

Cetu achu va c'hanouen, scuis oun ous e c'homposi ;
Me garfe teufe peb Breton da brena peb a hini :
Pesiou c'houec'h ha dabuzec guennec, coulz ha pêvar
varnuguent,
Louiset aour ha scoëtjou rognec a recevîn evel gent.

F I N.

E Montroulez, eus a Imprimiri LÉDAN.